



HAL
open science

An den gouez : aozadur ar roadennoù

Gilles Boucherit

► **To cite this version:**

Gilles Boucherit. An den gouez : aozadur ar roadennoù. Migrations et territoires celtiques / Divroañ hag enbroañ ar Gelted, Sep 2016, ROAZHON / Rennes, France. hal-02171561

HAL Id: hal-02171561

<https://univ-rennes2.hal.science/hal-02171561>

Submitted on 3 Jul 2019

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.

Gilles Boucherit

CRBC Roazhon

Ezel stag

AN DEN GOUEZ

Aozadur ar roadennoù

DIGORADUR

En e skrid talbennet « The Merlin legend and the Welsh tradition of prophecy¹ » A.O.H. Jarman a zispleg deomp an darempredoù pell a zo gant ar pezh zo anvet gantañ « patrom kentidik » Den Gouez ar C'hoadoù². N'eus amañ hengoun mojennel ebet da glask, e kement ma n'eo ket renablet an tem pe ar patrom e Motif-Index of Early Irish Literature³. Meneg a vo neoazh eus disoc'h ur c'hlaskerezh titouret mat a lak e darempred hengounioù Sumeriad hag Indez-Iranad hag en em c'houlenn war o ereoù ma 'z eus kenetrezo⁴.

Da neuze e vo displeget tres an Den Gouez, elese dielfennañ an teir neudenn bennañ a ya d'e sevel da heul disoc'h hor studi eus skridoù kozh Sumer hag impalaeriezh Akad : brezelel da gantañ gant an trec'h brezel, relijiel d'an eil gant an “ undoueegezh roueel”, skiantel d'an trede gant teknik arnevez ar skritur. Studiet e vo goude stad an traoù er broioù keltiek, Kembre hag Iwerzhon dreist-holl ha teurel ur sell war Iliz Roma enno. En ur ensellout politikerezh an impalaer Kustentin e vo gwelet penaos eo deuet ar Gristeniezh da vezañ relijion stad impalaeriezh Roma. Gant skoazell ar skritur e Latin da gantañ e vo komprenet gwelloc'h darvoud an Den Gouez keltiek dre e zremmoù disheñvel, Myrddin-Lailoken, Skolan, Suibhne : un darvoud sevenadurel a gas pell e wrizioù hengounel en amzer **dremenet**. An dra-se a zispleg n'eo ket an Den Gouez ur rummad kontadennoù a veze danevellet er beilhadegoù roueel pe get. Da lavaret eo, a-gent kristenidigezh ar Gelted ne oa ket eus tem Den Gouez ar C'hoadoù. Daou hengoun a gaver er pennad meneget gant Jarman en e zigoradur: meurgan Babilonian Gilgamesh ha mojenn Indian Rishyasringa, a gaver enno tem al loen-den pe digenveziad blevek o vevañ war ar maez, hag hini ar penitiour.

Ar Sumeriz ne oa ket anezho Semited nag Indez-Europiz. Mont tre a **rejoint da v**Mezopotamia adalek ar reter tro ar pevarvet milved Kent Hon Amzer⁵. Kalz eus an douaroù etre an Tigr hag an Eufrat a oa annezet gant Semited war gantre a voe trec'het gant an alouberien⁶. Ganto e kerzh ar pevarvet milved KHA e yeas an traoù war-raok war bep tachenn, ekonomikel, sokial ha politikel koulz ha speredel ma voe diorroet menozioù relijiel. Ijinet e **voe** ganto un hentenn skrivañ gennheñvel. Ne oa gant o yezh darempred ebet

1 BROMWICH Rachel, *the Arthur of the Welsh*, Cardiff, 1991, p. 117

2 *Ibid.*

3 CROSS Tom Peete, *Motif-Index of Early Irish Literature*, Indiana University, New York, 1969

4 WILLIAMS Charles Allyn. *Oriental affinities of the legend of the hairy anchorite*. The University of Illinois, 1925, 1927

5 KRAMER Samuel Noah, *Sumerian mythology*, Philadelphia, 1972, p. 6

6 *Ibid.*

gant ar semiteg. Ar **braz** eus an tablezennoù enskrivet (95 dre gant) a oa ekonomikel evel kontradoù, rolladoù, kontoù, pe melestradurel. Er prantad-se, etre 3500 ha 2000 KHA e voe ijinet gant ar Sumeriz ur panteon ha neuze da heul, ul lennegezh pinvidik. Met e hanterenn ziwezhañ an trede milved e voe aloubet ar Sumeriz d'o zro gant ar Semited a deuas o yezh Akadian da vezañ hini vev ar vro. Padout a reas ar Sumereg evelato da vezañ implijet evel yezh al lennegezh hag ar relijion e-pad kantvedoù c'hoazh, un tammig evel al latin e krennamzer Europa.

Gilgamesh hag Enkidu a deu war wel evit ar wezh kentañ e-pad prantad Sumer an trivet milved. Inanna, rouanez an Neñv he doa kavet war lez an Eufrat ur wezenn *huluppu*⁷ kouezhet, a gasas ganti en he neved eus Erech hag he flantañ en he liorz. Gilgamesh an haroz bras hag a oa o vevañ en Erech a glevas Inanna deiz bennak o leñvañ peogwir ne oa ket evit pilañ he gwezenn a oa deuet da vezañ bras annezet ma oa bet ouzhpenn gant un naer, un evn ha Lilith plac'h ar glac'har. Lazhañ a reas Gilgamesh an naer, al labous a nijas kuit d'ar menez ha Lilith a zistroas d'he lec'h annez. Tud Erech a zidroc'has ar wezenn ha kinnig an tammoù da Inanna evit ober kador ha gwele.

Ur *pukku*⁸ a reas Inanna eus he gwezenn *huluppu* hag ur *mikku*⁹ evit Gilgamesh met kouezhañ a rejont er bed izel dre un toull. Enkidu a glevas Gilgamesh e vestr o leñvañ rak ne oa ket evit adkavout an traezoù ha kinnig dezhañ mont da glask anezho er bed izel. Met goude diskennet ne oa ket Enkidu evit dont en-dro. Gilgamesh az eas da aspediñ Enlil doue an aer a oa e penn doueed Sumer d'ar mare-se. A-benn ar fin Enki, doue an dour hag ar furnez a urzhias Utu doue an heol da zigeriñ un toull ma c'hellas Enkidu dont er-maez eus ar bed izel. Mestr ha mevel a vriatas hag Enkidu ha kontañ ar pezh en doa gwelet du-hont. Digoradur ar varzhoneg-se a zo ennañ menozadoù Sumer diwar-benn krouidigezh an hollved.

Lammañ a reomp eus ar prantad sumerian klasel, 2600-2400 KHA, dreist hini semiteg Sargon, 2450-2150 KHA, m'eo bet faezhet ar Sumeriz betek ar prantad Sumerian nevez 2150-2050 KHA¹⁰, pe trivet remziad Ur¹¹ ma tiskouez ar skridoù a-zivout tem hengounel an Den Gouez a zedenn ac'hanomp. Hervez Ch. A. Williams meneget gant Jarman, n'eo ket hollek meurgan Gilgamesh e-giz m'emañ ganeomp. Lodennoù hepken eus an doare Babilonian kozh pe Akadian, (war-dro 2000 KHA) a zo bet embannet mui darn eus doareoù Akadian diwezhat pe Asirian (1300 KHA). Studiomp kentoc'h tem 'Enkidu an den blevek hag ar vaouez', eus ar skrid kozh¹².

TABLEZENN I (tammoù). Marteze orin Enkidu, krouet diwar bri? Ne ouzer ket penaos eo bet kaset ar vaouez d'al loen-den a veze o chom gant e chatal en ul lec'h digenvez nepell eus ar menez, penaos e voe hoalet ganti ha kaset d'he c'hêr vras renet gant ar roue meur Gish¹³.

TABLEZENN II, (Pennsylvania). Ninsun mamm doueel Gish-Gilgamesh a jubenn hunvreoù he mab ha displegañ ez eus bet ganet war ar maez un den eveltañ desavet gant ar menez kosmek -

7 *Ibid.*, p. 34. Halegenn ?

8 *Ibid.*, Taboulin ?

9 *Ibid.*, Gwalennig ?

10 *Ibid.*, p. 111-112

11 BOTTERO, Jean. L'épopée de Gilgameš. [s.l.], 1992, p. 26-27

12 WILLIAMS Charles Allyn, *Op. Cit.*, p. 13, 14

13 *Ibid.*, p. 15

graet eus neñv ha douar unanet¹⁴ - Enkidu, a vo keneil dezhañ. Da heul e vez kontet penaos e hoalas anezhañ ur vaouez a chomas gantañ e-pad sizhun hag ober anezhañ kevatal ouzh un doue. Goulenn a reas-hi outañ perak chemel gant chatal hag e ambrougañ betek Eanna templ nevet Anu en Uruk (Erech) ma vo degemeret gant Gish ar roue meur. Deskiñ a reas dezhañ evañ gwin e-lec'h sunañ laezh. Dont a reas Enkidu da vezañ drev, ha goude gwiskañ evel un den e kemeras e armoù evit stourm ouzh al leoned. Goude bezañ gwarezet buhez al loened gouez e teuas da warezañ hini ar re zoñv. [Troc'h]. Un den (Gish?) a lavar d'ar vaouez mont diwar-dro ar gour. Klemm a ra ha selaou ur brezegenn gentelius distaget gant an den da Enkidu war ar vuhez familh, al labour, dastum madoù ha bezañ leal ouzh e wreg. Bale a ra Enkidu gant ar vaouez e kêr Uruk a wel d'an holl e-giz pa vije ken kreñv ha Gilgamesh. Emgann a zo etre an daou zen. Enkidu a ro lamm da Gish met goude deuet sioul en-dro a gonfort e enebour. Dont a raint da vezañ keneiled.

Disheñvel bras eo doare Sumer diouzh hini Akadia. An daou skrid avat zo labour tud lennek goude ma reont kalz gant an hengoun pobl. An daou ivez a ra gant kalvezerezh nevez ar skrid. N'eo ket Sumer ur bed undoueel ha brezel zo bet ouzh meuriadoù war gantre. E bed hengounel Sumer e teuer da vezañ roue goude dimeziñ an doueez Inanna. Kannad an dud dirak an doueed ez eo ar roue. E bed Akadia adalek Naram-Sin, tro 2254-2218 KHA, edo ar roue lakaet da zoue en e vev¹⁵. Chikan hag abegadur a zo etre an dud diouzh lenn ar skridoù, ha dirummet merc'hed zo war a hañval. Ar pouezusañ evidomp eo Enkidu a ya a c'houez da seven. Er skrid sumereg koshañ eus an trived milved ez eo an darempred etre mestr ha mevel, Gilgamesh hag Enkidu, eus ar gwellañ. Ne ouzer ket re vat penaos eo deuet an darempred-se diwezhatoc'h en Akadia da vezañ un troc'h kefredel a laka anat ouzhpenn ur preder diwar-benn mont en-dro diabarzh ar gevredigezh, e-giz pa vije lusket gant un ideologiezh bennak. Ur vuhez kêr eo hag evit mont di diwar ar maez e rank Enkidu daremprediñ ur vaouez. Ne vo ket glav na bugel goude evel e mojenn Rishyasinga da heul, ha ret mat en em c'houarn.

Ni zo dedennet dreist-holl gant Enkidu evel gwarezour buhez al loened gouez. Eus pelec'h e teu an dudenn-se? Den Gouez ar meurgan a ziskouez c'hoazh roudoù splann eus un « haroz ar strujusted ». En hengoun pobl ne oa ket pimpatrom Enkidu an « den kentañ » met ul loen-den kentoc'h¹⁶ hag a ziskouez « haroz ar strujusted » evel loen a-zarn gant e gorf kreñnek. « Neuze satired, Pan, Silenus, faoned, ha tud c'houez ar c'hoadoù eus hengoun pobl Europa, a zo a live gant an Enkidu-orin, nebeutoc'h marteze gant haroz ar meurgan e-unan. E istor Nebuchadnezzar hag e doareoù kristen hon mojenn ez a war e grabanoù an digenveziad blevek. E stummoù zo an hengoun pobl e vije bet danzeet pimpatrom Enkidu – ket Enkidu e-unan marteze – o vont evel-se, en ur zebriñ hag evañ gant e chatal¹⁷. » A-hend-all daoust ha n'emañ ket Suibne war e grabanoù pe « en e c'hourvez¹⁸ » gant e bred laez nevez en toull graet er veuzelenn gant ur vaouez war-bouez he seul-

14 KRAMER, *Op. cit.*, p. 40

15 https://en.wikipedia.org/wiki/Akkadian_Empire [05/02/218], p. 9

16 *Ibid.*, p. 22

17 *Ibid.*, « Thus the satyrs, Pan, Silenus, fauns, and the « wild men of the woods » of European folk-traditions are in a class with Enkidu's original, if less directly so with that epic-hero himself. In the story of Nebuchadnezzar and in certain Christian versions of our legend the hairy solitary walks on all fours. It is possible that in some form of the popular tradition a prototype of Enkidu – if not Enkidu himself – may have been conceived as assuming that position in eating and drinking with his cattle. », p. 22-23

18 O'KEEFE, Joseph George, *Buile Suibhne*, Irish texts Society, 1913/1996, « lying down », p. 145

troad sanket betek hec'h ufern¹⁹?

Klasket e vez a-belec'h e teu seurt tudenn rak menoz un «haroz ar strujusted», da dostaat ouzh un «doue an heol», a c'hell bezañ ken kozh hag ar mare rak den-heñvel pa ne oa ket bet troc'het c'hoazh an ereoù-spered a veze o stagañ an dud ouzh al loened²⁰! Un avatar eus al loen-den «haroz ar strujusted» a gaver ivez e istorioù Indian Rishyasringa ar penitiour kornek:

En India da vare ar Veda e oa peder urzh pe doare bevañ askezek gant lezenn neved ar brahman er peniti (asramas): 1 *brahmacarin* pe studier pe deskibl dizimez. 2 *grhastha* penn tiad dimezet. 3 *vanaprastha* penitiour. 4 *sannyasin* askezeg war vale. An hini a zedenn ac'hanomp ar muiañ eo ar *vanaprastha* peogwir emañ o vevañ er c'hoadoù en ur brederiañ hag aberzhañ: « Askezer ar c'hoad pe ar penitiour fur o tont eus urzh ar penn-tiad a c'helle pe dilezel e wreg war-lerc'h pe he c'haout a-gevret gantañ²¹. Ret e oa dezhañ lezel e vlev o kreskiñ war e gorf. Darn a oa em ouestlet debriñ hag evañ evel buoc'hed ha gazeled²². Un tammig evel Suibne c'hoazh en e c'hourvez pe war e grabanoù.

Deiz bennak, ur c'hazelenn pe un heizez en ur evañ dour ul lenn spluiet gant sper Vibhandaka - ur sant bras eus kasta ar vBrahmaned hag a oa blevek e gorf betek bleñch e ivinoù - a deuas da vezañ braze²³. O vevañ en ur c'hoad distro tost d'ul lenn en ur benediñ edo ar sant met ne voe ket evit padout gant koantiz Urvasi un alarc'hez a blac'h. Ur verc'h doue e oa ar c'hazelenn a c'hanas ur mab da Vibhandaka, en doa lavaret Brahma war he fenn e vije kuit eus he stumm loen pa c'hanfe ur sant. Ar bugel voe anvet Rishya-sringa (*R̥ṣya-śr̥ṅga*) pe heizez-korn peogwir e oa bet ganet gant ur c'horn war e benn.

Indra anoazet gant ar roue Lomapada, en doa kaset ar sec'hor war e zouaroù ha lavaret e rafe glav da ober ma paouezfe Rishyasringa gant e vuhez c'harv ha mont da vevañ war douaroù ar roue. Hennezh ha kas merc'hed da luiñ ar sant yaouank. Erziwezh ez eas Rishyasringa touellet da heul ur plac'h yaouank hag Indra a gasas glav pil. Tad ar sant yaouank a voe kounnaret met habaskañ a reas pa asantas e vab distreiñ d'e vuhez c'harv goude ma vo bet ganet e vab.

Ar skridoù semitek hag Indian a zo boutin kenetrezo tem an den digenvez o vevañ war ar maez tost ouzh an natur hag al loened. Ezhomm zo anezhañ gant ar bed annezet evit diskoulmañ kudennoù. N'eus ken met ur vaouez evit ober dezhañ kemm buhez. Ne gaver ket meneg eus ar glav er skrid semitek met hini mac'homerezh Gilgamesh da vezañ pleget gant Enkidu²⁴.

Eus petore hengoun pobl a reer anv amañ? Ker buan all 'z eus bet klaskerien evit displegañ e oa ar skridoù vedek diwezhatoc'h eget re Sumer ha neuze Mezopotamia da vezañ lakaet da orin an holl skridoù-se. Gwelet eo bet ivez e oa bet savet ar braz eus ar skridoù kentañ hon eus gwelet e-pad ar prantad sumeriad nevez, da lavaret eo a-gent dont war wel ar strolladoù Mitanni e hanternoz Siria

19 *Ibid.*, p. 143-145

20 WILLIAMS, *Op. cit.* p. 25

21 WILLIAMS, *Ibid.*, : "This forest-anchorite, or hermit-sage, coming from the order of householder might either leave his wife behind or have her accompany him." p. 26

22 *Ibid.*, p. 27

23 Da dostaat ouzh Féliure Óengusso Céili Dé: « When Findach beheld her, he lusted after the girl so that semen fell from him onto a shoot of watercress that was in front of her. The girl then ate the shoot upon which was the semen, and thence was Boethine born. » W. Stokes, On the Calendar of Oengus, in *New developments in studies of the Wild man in Medieval literature* / Anna Matheson, Brest, UBO, EpisteMA, 12-14 December 2017

24 WILLIAMS, *Op. Cit.*, p. 9

tro 1500 KHA²⁵. E Boghaz Koy ez eus bet dizoloet tablezennoù all en Indeg kozh a ziskouez darempredoù etre ar sevenadur Asiriad-ha-Babiloniad hag an Indez-Iraniz²⁶. Ne oa ket ar glaskerien-hont evit gouzout e oa ar yezh Indeg kozh-se o tont eus an Iraneg kozh, e-unan o tont eus an Indez-Iraneg boutin a veze komzet e-pad prantad Sintashta war-dro 2.100-1.800 KHA met n'eo ket teuliaouet. Hag e skridoù Indeg kozh ar vMitanni e kejer gant anvioù evel Indra, Varuna, Mithra, hag an Nasatyas, evel e mojenn Rishyasringa ma vez kaset an amzer sec'h war rouantelezh Lomapada gant Indra. Dre se ne deu ket an eil hengoun eus egile, padal n'eo ket sklaer an darempredoù etrezo ma'z eus.

Met n'eo ket echu gant gwezennad ar yezhoù da heul an arlakadenn yezh Indez-Europeg, rak Kent-Indez-Iraneg a zo da vezañ lakaet a-gent 2.000 KHA, ha Rag-Indez-Iraneg tro 2.500-2.300 KHA. Ur rannyezh eus Kent-Indez-Europeg n'eo ken. Diskouez a ra-hi e kultur Sintashta-Petrovka er reter war ar gartenn. Tro ar mare-se eo dispartiet an Indez-Europiz diouzh o c'havell kreisteiz Ukraina hiziv, ha merkañ war-un-dro dibenn ar prantad Kent-Indez-Europeg²⁷.



Illustration 1: Sevenadurioù ar stепенnoù hag Azia tro 2200 ha 1800 KHA [ANTHONY, p. 413 Figure 16.1]

Evel-se e komprener e vefe krafioù boutin etre an holl sevenadurioù-se. Dumézil peurgetket a gomz eus anvioù an tri strollad kargoù sokial aroueziet gant bep a liv : gwenn evit ar beleg *Brahman*, ruz evit ar brezelour *Kṣatriya* ha du pe glas don evit ar mēsaer pe gounideg *Vaiśya*. Pelloc'h gant bep a doare lid-aberzhañ tagañ, goustilhañ, beuziñ²⁸. Ar souezhusañ eo adkavout an tri doare aberzhañ war-bouez nebeut er pezh zo anvet «ar marv trifleg» e skridoù kozh keltiek

25 ANTHONY, David. *The horse, the wheel, and language*, Princeton University Press, 2007, p. 412

26 *Ibid.*, p. 31

27 *Ibid.*, p. 51

28 *Ibid.*, p. 92

iwerzhoneg evel Buile Suibhne da skouer met ivez kembraeg diwar-benn Myrddin-Lailoken, gouez da gKenneth Jackson²⁹. An evezhiadenn a gas ac'hanomp endro ken pell ha mare Kent-Indez-Europeg diwezhat, war-dro 3.500-3.000 KHA, andon ar gwrizioù keltieg koshañ. Rag-Indez-Iraneg evel gwelet a ziwano diwezhatoc'h³⁰. An dud a gomze yezhoù indez-europek a oa anezho meuriadoù gounideien ha mêsaerien chatal³¹.

Evezhiadenn Jarman hag a ziskouez bezañ souezhus d'ar c'hentañ lenn a gav e blas penn-da-benn hor studiadenn ha reiñ hed dezhi pell diouzh ar bed keltiek testeniet³² nemetken. Dav lavarout ez eo kozh-douar an hengoun yezh keltiek, ken kozh marteze ha sevenadur Sumer hep na ve bet darempredoù etre an daou ved. Anat eo ez eus bet tennet skeudennoù arouezelezh Buile Suibhne digant ar bed kristen hep mar, met ur fazi e vefe dic'houzout ar sevenadur hengounel keltiek milvoaziek meur a wezh. Skridoù Enkidu ha Gilgamesh eus trived remziad Ur ha mojenn Indeg kozh Rishyasinga a zo diazezet war dem hengounel al loen-den digenvez. Hennezh a oa evel un doue ar strujusted ha lavaret hon eus dija e c'hell bezañ e orin ken kozh hag an amzer rak-den-heñvel. Da lavaret eo, ar penitiour blevek e kompagnunezh loened gant e vuhez diantek a c'hell an dud bezañ kevelet anezhañ gant al loen-den en o spered. A dra-sur kantvedoù ha kantvedoù a-gent hengoun kristen ar penitiour santel pe ar manac'h kloastret o tinaouiñ diouzh ar Bibl, e oa bet tostaet al loen-den strujus d'ar penitiour digenvez gant an Indez-Iraniz.

29 JACKSON Kenneth. « The motive of the threefold death in the story of Buile Suibhne », in *Essays and studies presented to professor Eoin Mac Neill*, Dublin, 1940, p. 536, 544

30 ANTHONY, *Op. cit.*, p. 82


31 *Ibid.*, p. 92

32 LAMBERT, P.-Y. « Lépointique : Italie, région des Lacs, 700-400 av. J.-C. », *La langue gauloise*, Paris, 1994, p. 14

TRES AN DEN GOUEZ

Sellet e vo e darn-mañ ar studiadenñ ouzh hon tud c'houez, Myrddin-Lailoken, Suibhne, ha Skolan e-giz pa vijent holl avatared eus un hevelep pimpatrom. Daou brantad amzer a zo ha daou lec'h : Myrddin-Lailoken e Breizh-Veur, Skolan e Breizh-Vihan er c'hwec'hvet kantved, ha Suibhne en Iwerzhon³³ er seizhvet hini. Etre an daou brantad hag an div vro-se e kaver un den Aedan Mac Gabrain roue kristen Dal Riada lec'hiet en Argyll e hanternoz Breizh-Veur, en em gavo stok ouzh daou du arventenn ar brezel : Iwerzhon eus un tu gant ar re Uí Néill, ha Breizh-Veur eus an tu all gant an Angled-ha-Saozon. Impalaeriezh Roma e-keit-se deuet da vezañ kristen ha reiñ an ton.

IWERZHON



<http://www.rootsweb.ancestry.com/~irlkik/ihm/ire500.htm>

Gant emastenn tiernac'h Tara an Uí Néilled e oa bet torret pempved kozh Iwerzhon hag e-tro dibenn ar seizhvet kantved edo an Uladiz (tud Ulster) enkaet e rannbarzh reter ar ster Bann, ha ma veze ganto c'hoazh o statud remziad a bempved. N'eo ket souezhus enta e vije aet tramor tud Dál Riada ken abred ha 500 da glask douarou all da drevadenniñ e bro ar bPikted, hogen mirout a raint o douarou en Iwerzhon e-pad kantvedou c'hoazh.

³³ Suibhne a vo gwelet ur predig e Breizh-Veur e kompagnunezh Lailoken, *Alladhan* er skrid iwerzhoneg.

Ne oa ket eus an Uí Néilled ur meuriad pe ur strollad meuriadoù, hogen un tiernac'h. Ur menoziad stur edont o pourchas, redek war-lerc'h un uhelrouantelezh monarkel, na vije ket stag ken ouzh roueelezh neved ar meuriad hengounel e darempred gant ar bed-holl : ur roue a deu da vezañ roue peogwir e timez gant doueez an damani. Roue an hengoun a oa danzeet evel un aotrou dreist o ambreger pennaotrouniezh war, ha degemer truej eus, ar rouantelezhioù distag dindanañ³⁴.

KUSTENTIN Iañ (impalaer roman)

Goude bezañ bet trec'h e Emgann ar Pont Milvius a-enep Maxence e gevezer, e roas Kustentin an trec'h d'an doue en doa dibabet : Heol Appolo, kendrec'het ma oa gant galloud dreist henezh a anavezo diwezhatoc'h evel hini ar gristenien³⁵. Eskop Essius eus Cordoue a weler e-kichen Kustentin evit ar wezh kentañ goude emgann ar Pont Milvius a zo emichañs eus ar re o deus e gendrec'het da welout en doue dreist en doa aspedet hag a oa bet roet dezhañ an trec'h, hini ar gristenien³⁶. Evit Kustentin ez eo dalc'het an doujañs dreist d'ar galloud santel hag uhel er relijion, lezirañ anezhi zo dañjerus evit traoù ar stad³⁷. Goulennet en doa Kustentin gant Sened-Iliz Arles e 314 e vije gouel Pask an Aotrou dalc'het er memes devezh dre ar bed a-bezh, elese an impalaeriezh Roman. « Dizellid e hañval bezañ lidañ ar gouel santel-se en ur heuliañ giz ar Yuzevien, ar re-se peogwir o deus saotret o daouarn gant ur gwallober difeiz, a zo o eneoù dallet dre ret gant ar saotradur...³⁸ ». An ton disprizius-se [...] a zistaol a dra sur emzalc'h muianiver kristenien ar mare³⁹. Met ne vo ket heuliet e gemenn er Reter tamm ebet. En ur vont di, goude bezañ bet trec'h war Licinius hag unaniñ da heul an impalaeriezh Roman, e wiria Kustentin an dizunaniezhioù niverus e kreiz ar gristeniezh. A-benn resteurel ar peoc'h relijiel ha sevel unvaniezh an Iliz, hag ivez moarvat dont a-benn eus e finvezoù politikel, e venn bodañ ur sened Iliz. E Nikea e 325 e vo dalc'het. Dre nac'hañ a-duiñ gant an holl diwar-benn an darempred etre Krist hag an Tad e lakae Arius unvaniezh an Iliz en arvar **ha** neuze hini an impalaeriezh roman. En ur Eskumunugiñ anezhañ e teue ar stad da vezañ 'brec'h lik' disentezioù an Iliz, pezh na voe nagennet gant eskop ebet⁴⁰. Kudenn bPask, bev abaoe pab Viktor kêr-benn Roma en eilvet kantved ne oa ket bet diskoulmet c'hoazh. En ul lizher kaset d'an eskibien n'o doa ket gallet bezañ eno, e skrivas Kustentin e vefe Gouel Pask lidet er memes devezh gant an holl. N'eo ket diwir enta lavarout eo bet staliet dre ret kudenn deziad Pask ha war-un-dro bouetaet an enepyuzeviezh gant an impalaeriezh roman, dre bersonelezh Kustentin, hag asant war dav an eskibien e-pad senedoù-Iliz Arles ha Nikea.

ENEZ VREIZH

34 BYRNE, Francis John. Irish kings and highkings, 2001, p. 71
(https://en.wikipedia.org/wiki/High_King_of_Ireland (15/10/2016))

35 MARAVAL Pierre, *Constantin le Grand*, Tallandier, 2014, p. 87

36 *Ibid.*, p. 111

37 *Ibid.*, p. 133

38 *Ibid.*, p. 278

39 *Ibid.*

40 *Ibid.*, p. 296

Goude distro ar Romaned d'ar gêr tro 410 e voe gouest ar Vretoned da zont a-benn eus an diaesterioù o-unan. Gildas a gomz eus un oadvezh aour⁴¹. Diwezhatoc'h hervez Gildas, *superbus tyrannus*, anvet Vortigern gant Bede, a c'halvas Saozon evit harpañ stourm ouzh alouberien an hanternoz. Trec'h bras Mons Badonicus warno diwezhatoc'h a voe heuliet gant peoc'h a oa o padout c'hoazh pa veze Gildas o skrivañ e sarmon anvet *de Excidio britanniae* tro 510, 530⁴² marteze. War-dro dibenn ar c'hwec'hvet kantved, e vo trec'het ar Vretoned en ul lec'h anvet Catterick, Catraeth diouzh ma kreder avat, ha kreñvaet galloud ar Saozon en hanternoz. Diwezhatoc'h e voe trec'h roue Bernicia Aethelfrid war Aedan mac Gabrain en ul lec'h anvet Degsastan e 603. Catraeth ha Degsastan zo div faezhidigezh pennañ ar Vretoned ouzh an alouberien saoz. Dedennus eo gwiriañ e kenglot ar prantad diaes-se evit ar Vretoned gant derou obererezh Iliz Roma e Breizh.

An henvoaz-mañ a veze o ren e Northumbria er seizhvet kantved⁴³ : pa oa pab Benedikt Iañ, etre 574 ha 578, e klevas Gregor e oa deuet e Roma estrenien yaouank kroc'henet moan ha meleganed, Saozon eus Deira renet gant Ælle d'ar mare-se. Skodeget gant an neuz anezho e c'houlennas aotre gant Benedikt mont da gelenn kristeniezh en o bro. Goude tri devezh bale e voe tizhet gant kannaded a gasas anezhañ e Roma en-dro. Bede⁴⁴ diouzh e du a gomz eus saozon yaouank e gwerzh evel sklaved er marc'had. Ugent vloaz war-lerc'h, hag eñ deuet da vezañ pab, e skriv Gregor d'ur beleg war an hent da c'hGalia ha goulenn gantañ prenañ saozon yaouank seitek pe triwec'h vloaz da vezañ lakaet e manatiez war zigarez ne oa ket tu da zispign an arc'hant galian en Itali⁴⁵. Kas a reas Gregor enta ur strollad kefrididi renet gant Aogustin war-du Enez Vreizh. E 597 e tilestras ar strollad war enezenn Thanet (Kent) - evel Hengest hag Horsa.

Pask

Arabat disoñjal p' en em strewas dael deiziad Pask dre Vreizh e-tro ar c'hwec'hvet, seizhvet kantved, an enebourien Saoz eo a daolas Iliz Vreizh ennañ, enebourien hag a felle d'ar Vretoned kas kuit kentoc'h eget amdreñ hervez youl Pab Gregor. Henezh ha kas e gannad Aogustin da Vreizh e 596⁴⁶ gant aotrouniezh war eskibien ar vro hag an urzh da “reizhañ ar re aheurtet”. Ar Vretoned, anezho kristenien abaoe kantvedoù ne blije ket dezho bezañ renet gant eskop un iliz a oa o paouez genel. Kannad pab Gregor a gemennas dezho gwall reuzioù brezel⁴⁷ ! Emsavusoc'h da Iliz Vras Roma marc'hata gant Barbared c'herman, Franked en o zouez, eget a-duiñ gant Kelted ha pa vefe eus an dud-se kristenien a-gozh. Ar politikerezh-se a dalveze eviti lazhañ div c'had gant un tenn ! Ober a ra P. H. Blair en e levr gant an termen “Trec'h lid Roma” da lavaret eo ‘dibunadeg lid evit goueliañ un trec'h brezel⁴⁸ e Roma’.

MYRDDIN – LAILOKEN, SUIBNE

41 BLAIR Peter Hunter. *An introduction to Anglo-Saxon England*. Cambridge, 1979, p. 13

42 https://en.wikipedia.org/wiki/De_Excidio_et_Conquestu_Britanniae (12/03/2017)

43 BLAIR, *Op. cit.*, p. 116-117

44 BEDE the Venerable, *Ecclesiastical history of England*. Book II, chapter 1, p. 71-75
<http://www.ccel.org/ccel/bede/history> (13/03/2017)

45 BLAIR, *Op. cit.*, p. 116

46 *Ibid.*, p. 117

47 BEDE, *Op. Cit.* Book 2, chap. 2, p. 76-78

48 <https://en.wiktionary.org/wiki/triumphus>

Istor an tri den, anezho holl tudennoù faltaziet emichañs a c'hoarvez e-barzh ul lec'h hag un amzer bevennet mat : da lavaret eo ar c'hwec'hvet hag ar seizhvet kantved etre Breizh an hanternoz hag Iwerzhon. Un den arouez a vod an div vro : Áedán mac Gabráin †609 roue an Dál Riada e Skoz, kempred gant Rydderch Hael eus rouantelezh Strathclyde (Ystrad Clud war ar gartenn).



Illustration 2: Yr Hen Gogledd
[\[https://en.wikipedia.org/wiki/Kingdom_of_Strathclyde\]](https://en.wikipedia.org/wiki/Kingdom_of_Strathclyde)

Myrddin⁴⁹ a zo tudenn bennañ ur vojenn na chom anezhi nemet bruzunennoù enlakaet e c'hwec'h barzhoneg a gaver e dornskridoù deiziadet eus dibenn an daouzekvet da greiz ar pempzekvet kantved. Tri eus ar barzhonegoù-se a gaver e levr du Carmarthen (*tro* 1.200): an *Affallenau* (Gwez avaloù), an *Hoianau* (Gourc'hemmennoù pe Pemoc'h bihan) hag *Ymddiddan Myrddin ha Thaliesin* (emziviz Myrddin ha Taliesin).

En *Affalennau* da skouer, hag a zo bet savet adalek an navet kantved etre 850 ha 1050, ez eus tri foz a gaver enno danvez koshañ mojenn Myrddin e kembraeg hag a c'hell bezañ gwelet evel kalonenn ar varzhoneg⁵⁰. Er gwerzennoù-se e komz Myrddin eus un den foll o vevañ ur vuhez reuzeudik e koadoù Kaledonia pe Coed Celyddon, hag endra m'emañ o prederiañ war e vizer hiziv e chom a-sav e eñvor war e levenez kollet hag ar gwall reuz a gemmas red e vuhez. An tri foz-se a gaver enno bruzunennoù ur vojenn diwar-benn Myrddin, Gwenddydd, Gwenddolau hag emgann Arfderydd. Muioc'h a ditouroù a gaver c'hoazh e *Hoianau*. Rhydderch a zo deskrivet evel chaseour hag ivez difennour ar feiz. Rydderch Ap Tudual eo evel-just, anavezet evel Rydderch Hael (pe brokus) roue Dumbarton e Skos predeneg tro dibenn ar c'hwec'hvet kantved. Dre ma komz Myrddin en *Affalennau* hag en *Hoianau* eus Gwenddolau evel e bennroue ha ma eztaol kas hag aon eus

49 JARMAN Alfred Owen Hughes. The Welsh Myrddin poems, in LOOMIS Roger Sherman, *Arthurian literature in the Middle Ages*, Oxford, 1979, p. 21

50 *Ibid.*

Rydderch hag e dud, e c'heller tennañ diwar-se e oa Arfderydd un emgann a voe trec'h Rydderch ennañ war Gwenddole hag e lazhañ. Anat eo ivez eo bet un dismantr bras ar faezhidigezh evit Myrddin dre m'eo bet e-pad hanter-kant vloaz e-maez lezenn ha diskiant e koad Celyddon, o kavout dezhañ bezañ hemolc'het gant Rydderch hag e heulierien. Kollet en defe Myrddin tri breur ha lazhet e niz.

E Bro-Skos e kaver roudoù eus un Den Gouez. E Buhez sant Kentigern eus an daouzekvet kantved, e skriv Jocelyne eus un den anvet Laloecan (Laloicen) edo o vevañ e lez ar roue Rederech. Istorioù all a zo en un dornskrid eus ar pemzekvet kantved anvet Lailoken ha Kentigern hag a lavar e kejas Sant Kentigern en ul lec'h digenvez gant unan bennak a oa foll en noazh ha blevek anvet Lailoken. Darn a lavar e oa bet e anv Merlin (Merlinus) ha ne oa ket evit dic'haouiñ evit e bec'hedoù e-touez an dud. Kondaonet e oa bet neuze da c'houzañv en digenvez e kompagnunezh loened.

N'eo ket bet savet tenergan Buile Suibhne a-raok deroù an trizekvet kantved : « Milliget eo bet Suibne gant Ronan rak e emzalc'h disakr a-enep dezhañ pa oa deuet da vevennañ un dachenn evit sevel un iliz war douaroù Dál nAraidi emañ roue warno. Stlepel a reas Suibne en ul lenn salmeg ar sant ha lazhañ un den a-benn terriñ an arsav a glaske Ronan staliañ etre an daou lu tal-ouzh-tal, Domhnall mac Aedh ouzh Domhnall Brecc. War ar marc'had e lazhas unan eus e salmerien kent an emgann meur. Treiñ a ra Suibhne da foll da vare ar youc'h brezel etre an daou vagad. Goude kontañ ur maread avañturioù skrijus a-wezhioù e ro lec'h tem an den foll tamm ha tamm da hini kristen silvidigezh an ene dre C'hras Doue. Kejañ a raio diwezhatoc'h gant ur sant all anvet Moling a-raok mervel. Beziet e vo Suibne gantañ en un iliz. »

An daolenn-mañ a gaver e Buile Suibhne : eus tu ar brezel, roue Uí Néill, Domhnall mac Aed a-enep da Domhnall Brecc roue Dál Riada kevredet gant Congal Claen ha Suibne roue Dal nAraide (cruithni). Eus tu ar relijion, Ronan o vallozhiñ Suibne meur a wezh ha Moling sant ha barzh, a raio war-dro Suibne betek e varv. An testennoù-se zo bet lakaet dre skrid meur a wezh abaoe an dekved kantved d'an nebeutañ. Ar skrid-mañ eus penn kentañ an trizekvet hini a zo diouzh perzh Iliz Roma a zo bet trec'h e-pad ar prantad istor studiet war iliz keltiek sant Colomba. Iona a zo bet diwezhat-tre **oc'h** anavezout deiziad Pask Roma, dre hanterezh Adomnán. En Iwerzhon evel e Breizh Veur e kaver Iliz impalaeriezh Roma o stourm a-enep kristenien anvet “paganed” ganti a-wezhioù. Ganti ivez eo bet danevellet dre skrid ar prantad istor-se. Ar skribed a anaveze mat an hengoun. *Filid* gwezh all a oa aet da venec'h. Setu n'eus souezh ebet e vije kavet e-barzh ar skridoù-se perzhioù hengounel eus ar c'hentañ troc'h.

An daou istor-se zo anat an darempredoù ouzh o unaniñ. Myrddin-Lailoken ha Suibhne zo 'Tud c'hGouez ar C'hoadoù'. Kollet o skiant vat ganto en emgann ez eo an daou zen ankeniet ha kablus. An daou ivez zo diouganerien. Mervel a raio [Myrddin-]Lailoken⁵¹, gant ar marv trifleg goude bezañ bet sakramantoù digant ar sant⁵². An tri marv-mañ zo meneget a-zivout Lailoken : labezañ, beuziñ, goustilhañ. Tagañ a oa doare aberzhiñ ar *Brahman*, goustilhañ hini ar *Kṣatriya* ha beuziñ hini ar *Vaiśya* evel gwelet uheloc'h. Un hengoun ken kozh enta ha mare ar yezhoù Kent-Indez-

51 Evit a sell ouzh Skolan ne c'hellan ket ober gwelloc'h amañ met kas al lennerien davet pennad Donatien Laurent, La gwerz de Skolan et la légende de Merlin, in *Ethnologie française*, I, 3-4, 1972, p. 37-40

52 JARMAN, *Op. cit.*, 1979, p. 25-6

Europeg, pa ne oa ket bet savet o skridoù c'hoazh gant ar Sumeriz. Ha peogwir e kaver danevell gentañ ar marv trifleg e buhez Colum Cille skrivet gant Adamnan, e kav da Kenneth Jackson eo enezenn Hy (Iona) an Dál Riada kavell mojenn Den Gouez ar C'hoadoù.

An eil perzh hengounel heverk a gaver e Buile Suibhne a zo hini ar vamm-loen a c'hellfe bezañ ken kozh hag ar mare pa n'o doa ket an dud paouezet c'hoazh gant prantd al loen-den. Ul lec'h bras a vez roet d'al loen karv e mojenn Den Gouez ar C'hoadoù: stag eo Myrddin-Lailoken gant ar c'harv dre anv e veuriad ar *Selgovae*⁵³ anezho enebourien a-gozh ouzh Roma⁵⁴. Evit a sell ouzh Suibne eo splannoc'h c'hoazh. Graet ton e vez d'ar gwez e barzhoneg ar rannbennad 40. Diouzhtu war-lerc'h e teu war wel un aridennad kirvi emañ Suibhne perc'henn war darn anezho : « Evit kalz anezho da vezañ ma c'hirvi⁵⁵ ». Komz a ra un tammig pelloc'h ouzh mamm ar bagad kirvi-se : « A mathair na groidhi-si », « A Mamm ar bagad-se ». *Fer Benn*, anv gwirion Suibhne hag a dalvez kement ha Den ar c'hernioù pe Den ar c'hornioù⁵⁶ a zo gwarezour bagad kirvi ur vamm, « mamm marzhel al loened hag an dud⁵⁷ » marteze. Kaset omp adarre d'ar mare meneget diagent diwar-benn al loened hag an dud.

DISOC'H

Adkavet e vez en Den Gouez ar C'hoadoù hevelep aozennoù evel ar re hon doa kavet e Den Gouez Akadia e derou hor studiadenn. Ar skritur zo boutin kenetrezo, ar brezel ivez hag ur relijion undoueel. Evel e oa bet komzet eus “undoueelezh roueel” relijion an Akadiz e Mezopotamia, amañ en Europa ar c'hornog e komzer eus undoueelezh relijion kristen stad impalaeriezh Roma, kontrol da relijion an amzer bagan ma c'helle an dud bout undoueour pe get. Hiviziken hag evit mad politikel an impalaeriezh e vo ret d'an holl dud krediñ ha pediñ heñvel.

E Mezopotamia hag en Azia e tavee an hengoun d'un doue pe d'ul loen-den haroz ar strujusted, evel Enkidu pe Rishyasinga. En Azia e oa stag an askez gant ar sec'hor, hag ar glav gant ar strujusted. En ur ger, ret-mat e oa gant ar sant paouez gant e santelezh evit d'an douar dougen frouezh. En danevell Akadian avat, n'eo ket Istor Enkidu ken splann pa rank hennezh hag a zo o vevañ war ar maez gant al loened mont gant ur plac'h foran, a oa sakr gwezh all gant ar relijion gozh emichañs, a-benn tremen a c'houez da seven. A-c'houdevezh e vo techet tem al loen-den doue pe haroz ar strujusted da genunaniñ gant hini ar penitiour askezek, a deuio da vezañ kristen diwezhatoc'h.

An arventennoù e Breizh hag en Iwerzhon a zo kenstur gant re Akadia e Mezopotamia evel

53 LAMBERT, Pierre-Yves. Segais, karv. Seg, sed, séd (spirante?) : segovae Segais. Segustius, chien de chasse / Blažek Vaclav, EPHE Philologie celtique, prezegenn an 11-04-2014, notennoù.

54 TOLSTOY Nicolai. *The quest for Merlin*, London, 1985, p. 268, note 26.

55 « Cidh iomdha dom dhamraidh-si / Though many are my stags » (O'Keeffe, *Op. cit.*, p. 79).

56 *Alladhan*, da lavaret eo Lailoken, a gejo gantañ Suibne diwezhatoc'h a zo anvet *Fer Caille*, da lavaret eo Den ar C'hoadoù

57 ANISIMOV, A.F. Cosmological concepts of the peoples of the North in *Studies in Siberian shamanism*, Toronto, 1963 : « Evenk *bugady enintyn*, the mythical mother of people and animals, is conceived among various Evenk clans in one and the same zoomorphic image of an elk cow or the doe of a wild deer.» p. 179

gwelet, met kontrol d'ar pezh a greder gouzout, ez eo pounner an degas keltiek e mojenn vMyrddin hag hini Suibne e-skoaz d'an hini kristen. An degas kristen o tont eus ar Bibl a zo dleour ivez eus gwerzioù-meur Enkidu ha Gilgamesh bed Sumer, koshoc'h eget hini Akadia. Bouetaet e vez an dezrann eus ar gwerzioù-se gant un hengoun koshoc'h c'hoazh. Kement-all a c'heller lavarout eus hengoun Rishyasringa ar skourr Indez-Iraneg. An daou hengoun neuze a c'hellfe adsevel ken pell ha mare al loen-den strujus, doue pe haroz, bout ma ne weler ket mat an darempred a vefe etre an daou skourr.

E Buile Suibhne e vefe kavet aspadennoù mitologel ar mareoù-hont er rannbennad 40 ma komz *Fer Benn* kredabl ouzh « mamm marzhel al loened hag an dud ». Perc'hennez eo ar vamm war ar bagad kirvi zo dindan warez *Fer Benn* anv gwir « Suibhne ». Seul wir e lavaromp ma'z eus bet kavet roudoù eus ar marv trifleg e holl vojennoù keltiek «Den Gouez ar C'hoadoù», un hengoun hag a zo ken kozh hag an trivet pe ar pevarvet milved zoken Kent Hon Amzer.

Pennad savet gant doujañs e koun Martial Ménard.